

**Di 'r Yaou 29 a viz meurzh e Kemper (MPT Kerfeunteun da 8e30)
Di gwener 30 a viz meurzh e Pondi (Palez ar c'hendalc'hiou) da 9e.**

Mistero Buffo

E-pad ar grennamzer ha da c'houde zoken e veze c'hoariet misterioù. An darnvuiañ anezhe a veze abadennoù sakr, o tiskouez buhez Jezuz Krist pe neuze buhez ur sant bennak. Pa lâran e vezent c'hoariet, peurvuiañ e veze diskouezet war al leurenn nemet al lodenn gentañ, an hini a dremene war an douar (gant seizh c'hoant mabden) ; an eil lodenn a veze graet « Purgator St Patrig » deuzouti (blaz prezezennoù ar veleien warni) a veze laosket a-gostez. C'hoariet e veze ar misterioù-se gant ar bobl hag arabat deoc'h krediñ e veze graet en un doare sirius bepred, en desped ma veze linennoù da zistagañ !

Tamm ha tamm e oa deuet an dud vunut da danial pe da zezrevell ar misterioù-se, o fal gante kaout diduamant hag a- wechoù ober goap deus ar veleien hag an iskibien evit diskouez ne heulient ket atav an *hent mat* gant al lezennoù a lakaent e plas.

Dario Fo en deus dastumet skwerennoù deus ar misterioù pagan-se. Amañ ne vo ket kontet deoc'h eured Kana hervez an Aviel med rentañ-kont unan en doa paket ur pezh mell tortad e-pad ar friko ! Ar *Basion Vras* ne vo ket kontet deoc'h kennebeut met kentoc'h darvoudoù bihan hag a dremen e-touez an dud e-pad ar basion... Pemp taolenn hon eus dibabet kinnig deoc'h e-touez an dek bennak bet dastumet ha renket ha kempennet en un doare a-feson gant Dario Fo.

Roll ar c'hoarierien

Ar prologer : Bernez Phelep

An ael hag al lonker

An ael : Ronan Hirrien

Al lonker : Jakez Andre.

Burzhud Lazar

Maouez 1 : Yvonne Simon

Maouez 2 : Sylvie Vigouroux

Maouez 3 : Helle Vigouroux

Maouez 4 : Caroline Corre

Gwazed : Marc Guillou,

Ronan Hirrien, Tangi Kermarreg,

Bernard Fily.

An hini dall hag an hini kamm

An hini dall : Tangi Kermarreg

An hini kamm : Mark Guillou

Ar farwell hag ar marv

Ar farwell : Ronan Hirrien

C'hoarier 1 : Yvonne Simon

C'hoarier 2 : Sylvie Vigouroux

C'hoarier 3 : Jakez Andre

Ar marv : Helle Vigouroux

Bonifas an eizhvet

Bonifas : Bernard Fily

Ar gurusted : Caroline Corre hag

Helle Vigouroux ; Ronan Hirrien

**C'hoariet e vo Mistero Buffo e Roazhon d'ar sadorn 12 a viz Mae. (Skeudenn)
hag e Skaer d'ar Yaou 12 a viz gouere. (KEAV)**